

Janus dans  
deiz ha breiz en 1870  
p. 71  
signe G.G.

la la la la

la la la la

# KAN HA PEDEN AR MERDEAD

M. Surran  
ma s'it que cest  
de un pretre  
qui fut  
a Joffrenny. (Vénif)

Ton : Mesait hon bagik vihan.

## Kentan diskan

Mirel hon bago, hon listri,  
Gwerc'hez, mammea ar graso  
Gret na noazo d'ar verdaidi  
Nag avel, na kuruno,  
Na kerrek, na gwageono :  
Ni 'westl d'Ec'h hñu c'halono. (bis)

## KENTAN LODEN EUZ AR C'HAN

### Micher boaniuz ar verdaidi

Ar merdead, den reuzeudik,  
Evit gonid ha vue,  
Noz-de 'renk sturian ha vagik,  
Dindan ar glav, ann arne.

Ar mousik bihan ha-unan,  
(Bugelik c'hoaz ken dister !)  
Pell diouz ha vamm a renk poanian :  
Gwerc'hez, bet mamm 'na ha geaver !

### O kuitad ann od

Domp ma bagik, kerz prim breman,  
Displeged eo da watio :  
Gwerc'hez, plijet gan-E'h levian,  
Skauvoc'h 'ze 'vo ma foanio.

### Ar merdead o sonjal enn he bec'hejo

Meur a besk a gav he varo  
O tivoedan aun hig-an :  
Mewenti ha gwall-ebato  
A goll ka'z a gristenien.

### Diegi ar pec'her

Ho ! gand pebez nerz e stourman  
Ouz ar mor, pa ve garo,  
Pegen diek onn, pa glaskan  
Gonid war ma gwall-decho !

### Greveded ar pec'hed marvel

A walc'h eo eur gwall varr-avel,  
Evit koll bag ha bue :  
A-walc'h eo eur pec'hed marvel  
'Vit 'n em goll korf hag ine.

Braz eo hon c'heun o koll eul lestr,  
Karget a bep seurt mado :  
Et mad, pa gollomp gras ho Mestr,  
C'houervoc'h kalz eo ho kanvo.

### Stad truezuz ar pec'ner

D'ana o! prim e renker levian,  
Pa deu ar vag d'ober dour :  
Ken prim e tiefean, pa bec'hann,  
Mont da glask eur c'hovezour.

Ann dienez war ar mor glaz...  
Moraer... pebez stad euzuz !  
Stad aun ine 'zo gwasoc'h c'hoaz,  
Pa dilezer tol Jezuz.

## EIL LODEN EUZ AR C'HAN

### Ar merdead o tistrein ouz Doue

#### He c'hlac'har

Euzuz mor drouz ha kuruno,  
E-pad eun nozvez tewal :  
Spontusoc'h meurbed eo mouezo  
Ar re daonet o iudal.

D'ann han, pa diver ma c'houezen,  
Pa skalf ma daouarn, er goan,  
Me 'zonj eun Mamm ar bec'herien,  
E tal ar groaz o ouelan.

#### He fian

'Liez 'renk eul lestr, pa distro,  
Gortoz enn pleg ar porz mor :  
Kalon Mari, dor aun Nenvo,  
A zo d'imp bepred digor.

Aliez hon euz kalz a boan  
O pardoni hon mestro :  
Jezuz a bardon peb-unan  
'Vid eur berad gwir daero.

Ma zud a drid, pa douaran,  
Goude eur gwall varr-amzer :  
A'n Nenv a drid mui, pa deuan  
Da zistrei ouz ma Zalver.

### He joa

Pa z'end ar vagik ouz ar stur,  
Pebez joa d'ar voraerien !  
Da Zoue pebez plijadur  
Pa z'enter ouz he lezen !

Kaer ha gwenn-kann eo hon gwelio,  
Pa strik eur baun-hael out-he ;  
Kaeroc'h c'hoaz eo hon ineo,  
Pa luc'hoat gand gras Doue.

### PEDEN AR MERDEAD D'AR WERC'HEZ

Ma iui ann avel dirollet,  
Mar kroez ar gwagenno braz,  
Sterelen-vor am c'hennærzat  
Dre ho kallouï hag ho kras. *Miret, etc.*

Ha mar deü ar mor d'am lonkan,  
Bezët mamm d'am bugale :  
Piou ho diwallo er b'ï-man ?  
C'houï, Gwerc'hez a dr igare.

War-n-he skuillet, Mamm a drue,  
Ho teneran madelez ;  
Dre ma teuio ann oad d'ezhe,  
Gret ma kreskfont enn furnez.

Bezët true ouz ma friel,  
Ha dizec'het he daero ;  
'N he faouraute he zikouret,  
C'houï skoazel ar priejo.

Bet c'hoaz true ouz ma mamm baour,  
Mantret gand ar velkoni ;  
Ho true 'zo walloch 'vid aour,  
Plijet harpan he c'hozni.

Pa lezfomp bago ha listri,  
Kemeret hon ineo,  
Prizet ambroug ho merdaidi  
Bete porz kaer ann Nenvo.

Mez, bemde, bemnoz, dre vurzud,  
C'houï hon mir a wall varo :  
Ra welfomp eta c'hoaz hon zud !  
Rouanez hon c'halono.

Gred eo ma feden gant fian ;  
Rak peb-unan a lavar :  
Mari zo mamm ann esperans,  
Bikenn na rai skouarn vouzar.

Sturiet breman ma bag d'ann ôl,  
Hep drouk ha gand al lano,  
Ha jouz-braz, ar martolod  
Enn hoc'h enor a gano.

### Diskan diwean

C'houï vir hon bago, hon listri,  
Gwerc'hez, mammen ar graso,  
C'houï 'vir na noaz d'ar verdaidi  
Nag avel, na kuruno,  
Na kerek, na gwagenno :  
Gloar d'Ec'h, mammen ar graso. (*bis*)

Ha pa vefomp distro, Gwerc'hez,  
Beo ha iac'h dre ho krad-vad  
Ni 'gano c'hoaz gand levez,ez,  
Evid ho trugarekad. *C'houï vir hon bago*